

270

Chanson ar Bonomic.

(460, suite)

Debonjour d'ec'h, Jannedic,
 Bonjour d'ec'h a lavaràn,
 Brêmân.
 Pelec'h emañ 'r Bonomic,
 Pa na m'ân o tomân,
 Brêmân.

E m'ân duze el liors,
 Oc'h evessat an ed,
 Me a gred.
 It-hu hardi d'ev cavet,
 Ha n'o refuso get,
 Me a gred.

Debonjour d'ec'h, Bonomic,
 Bonjour d'ec'h a lavaràn
 Brêmân;
 Conje ho merc'h Jannedic
 Diganech a c'houlennân,
 Brêmân.

Conje ho merc'h Jannedic,
 Da zemei er bla-mân.

E leal, va merc'h Janned
 Na zemeo get c'hoas,
 Evit c'hoas;
 Chom a rai daou pe dri bloas
 Da zoul an ebat c'hoas,
 Evit c'hoas.

Be ho po geuz, Bonomic,

(461)

Bea va refuset,
 Me a gred:
 C'houi deuzo d'he ofr din-me;
 Mes ne c'hemerin get,
 Me a gred.

Dalit ho sac'h, cloareguic,
 Lagit-an var ho scoa,
 Ia da.
 Goubz eo d'ec'h en casot brêmân
 Evel en casot da vloa,
 Ia da.

Neuze c'ha 'r c'hloarec yannanq
 Da garet Janned oh!
 Ho! ho! ho!

Ur proqic en amitic
 Diganech a c'houlennân
 Brêmân.

(463)

Elec'h ur proqic, va douc,
 C'houi pezo daou ha tri,
 Ia, c'houi;
 Ha mallos d'ar goal deodou
 Zo cos d'hon dispartic,
 Oh! ia ni!

Abeq un eiz de goude,
 Janneth zo chomet clân;
 Ia clân!...
 Ha comanq ar Bonomic

(462)

Dont d'ey en chagrinàn :
Ha hân hân!

Neuze e za 'r Bonomic,
E za da foueta bro.
Ho! ho! ho!

(464) Da glass ar c'hloarec yamang,
Da quemer Janned, oh!
Ho! ho! ho!

Debonjour d'èc'h, cloareguic,
Bonjour d'èc'h a lavaran,
Bremân;

Abaoe moc'h bet du-mân,
Janned zo chomet clân,
Oh! ia clân!

Laret 'm bsa d'èc'h, Bonomic,
O pije va c'hlasqet;
Hac abret
E teujec'h d'he ofr din-me;
Mes ne c'hemerin qet,
Na rin qet.

Dalit ho sac'h, Bonomic;
Lagit-ân var ho scoa,
Oh! ia da.

Loubz eo d'èc'h en caout bremân,
Evel en caout da vloa,
Oh! ia da.

fin

(Vol. II, p. 460-465.)
13 str. numérotées.